

AR VESTREZ DISOURSI

Son nevez, savet gant ar barz Kastellad Francis Moal
• Alc'houeder Leon •

I

Me a meuz kavet eur vestrez
Deuz ket riou d'he daoulagad
Ar-seurt se, gaver ket bembdez
Nag er foar, nag er marc'had.

DISKAN

Me a meuz eur vestrez
Ag a zo disoursi
Ne zeuz ket er barrez
Eun all eveldhi

II

Dissul zoa en oferen vintin
Re hir e kave ar sermon
Lavaret reaz en eur c'hoarzin
Poënt echui aoutrou Person.

III

Dilun zedo e frikotal
Aveac'h gânt lein oar staget
War an daol savaz da louc'hal
Gwin aman, me meuz sec'het.

IV

Ouz an noz oa bet arretet
Vit diskwez e faperiou
Lavaret reaz d'ar soudardet
« Pourquid onc, me prenez vous. »

V

Deac'h oa galvet gant eun aoutrou
A c'houlepne hent Landj
Troït a gleiz, troït a ziou
A kit war eün emezi.

Reproduction interdite

VI

En deiz, all, zoa eat da voalc'hi
Ar poull ioa skournet kalet
Gant an amzer man emezi
War vella za va iec'het.

VII

Pa zoa noz, e zeaz da c'horor
Eb na goulou, na nentra
Vele ket war lost an taro
Eo e zedo e chacha.

VIII

Pa vez e c'hoari domino
An arc'hant vo war an daol
En e godez a lakaio
Rag gounit a ra peb taol.

IX

Pa c'hello kregi er c'chartou
Koulz hag hi meuz ket gwelet
Chom a rafe nosveziennou
Eb ma dije c'hoant kousket.

X

Setu aze, deoc'h kanet
Son ar plac'hig disoursi
A c'houi p'ho pezo he desket
Gano ive anezi.

Francis MOAL